




Rod an amzer he-deus malet eur bloaz all.

PHOTO JOS

BLEUN-BRUG

Niv. 96 (Mizieg-Mensuel)
Koumanant-Abonnement : 500 fr.

GENVER - C'HWEVRER 1957

TAOLIT EVEZ MAD

Gand miz Kerzu emañ ar mare da adkoumananti.

Kasit 500 lur (600 lur kourm. a enor — 1.000 lur kourm. madoberour) da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Kas ar skridoù da : **Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).**

Mar fell deoh beza ezel euz ar Bleun-Brug pe rei deom skoazell, kasit ho skodenn da :

V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.,

C. C. P. 544.22 Nantes.

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1000 lur.

TAOLENN

Kaoud fiziañs, gand L. B.	1
An Ao. F. Fal'hun, aluzenner-meur ar Bleun-Burg, gand V. Favé.	2
An Askol gwenn, gand Reun ar Mough	4
Mouez an tad, gand F. Fal'hun	5
Rondel goz Sandrione, gand Mab an Dig	7
Degemer mad, gand A Koulouarn	10
Eur hanol Suez 3500 vloaz zo !, gand an D ^r J. Tricoire.....	12
Taol an oferenn, gand Mouale'h ar Sklerder	14
Keleier	16

Bennoz Doue d'on oil vadoberourien :

Prof a 1.000 lur : MM. Kervella, *Tréguier* ; Colonel de Malleray, *A.F.N.* ; Souffès-Desprès, *Guipavas* ; Saint-Jean, *Paris* ; Mlle Cazin D'Honinctun, *Glomel*.

Prof a 500 lur : MM. Badoual, *La Harmoye* ; Bongrain, *Mamers* ; D^r Rousseau, *Nantes* ; Nicol, *Louargat* ; Chanoine Coadou, *Quimper* ; Abbé Renaud, *Paris* ; Chanoine Guivarch, *Landivisiau* ; D^r Ezel, *Douarnenez* ; Coroller, *Paris* ; Richer, *Brest* ; Mme Le Moal, *Nantes* ; MM. Abbé Henriot, *Pontivy* ; Le Du, *Lopérec* ; Etienne, *Saint-Carreuc* ; D^r Colonne, *Rouen* ; Mme Libéral, *Trois-Épis* ; MM. Radenac, *Paris* ; Ozoux, *Abidjan* ; Renault, *Paris* ; Abbé Burgeot, *Vannes* ; Mocaër, *Quimper* ; Abbé Foulon, *Plogastel-Saint-Germain* ; Coulouarn, *Rennes* ; Mazé, *Petit-Couronne* ; D^r Jaouen, *Kerlouan* ; Guillerm, *Lannilis* ; Morvan, *Tréguier* ; Menou, *Audierne* ; Le Bihan, *Saint-Pol* ; Abiven, *Guissény* ; Abbé Troal, *Landivisiau* ; Abbé Bleunven, *Saint-Renan* ; Kermorgant, *Brest* ; de Guébriant, *Saint-Pol* ; Mme Tanguy, *Roscoff* ; Mlle Troadec, *Locronan* ; Le Goe, *Scaër* ; Coadou, *Locronan*.

Prof a 100 lur : MM. Fal'hun ; R. P. Lemarie ; Tanguy ; Abguillem ; Le Minor ; Le Graet ; Lemercler d'Erm ; Le Dreff ; Fontaine ; Le Cossec ; Ch. Suignard ; Jaouen ; Kervran ; Ch. Havard ; Greff ; Le Saint ; Sparfel ; Allain ; Le Chapelier ; Le Moigne ; Bonvalet ; Tricoire, Legrand ; Bothorel ; Fleuriot ; Nédélec ; R. P. Rimpot ; Hély ; Quillivéré ; Moreau ; Turpin ; Kermarrec ; Henriot ; Ruban ; Thomas ; Cloarec ; Le Gac ; Denmat ; Even ; Aouston ; Pichon de Longuville ; Poulichet ; Kerbirou ; Le Ster ; Audic ; Le Carrer ; Prigent ; Guillieux ; Séité ; Chevillotte ; Even ; Jézéquel ; Guernic ; Quelven ; Bothorel ; Kerlan ; Cognic ; Guénégan ; Inizan ; Pellé ; Bihannic ; Bergot ; Dom Nicolas ; D^r Léon ; Kerdillès ; Laurent ; Bizien ; Quéfellec ; L'Hour ; Jaouen ; Withebene ; Guilcher ; R. P. Trébaol ; Laurent ; Toupin ; Bihannic ; Toby ; Acquitter ; Mines Abgrall ; de Saint-Pierre ; Bideau ; Guénéguès ; Mlle Martin ; Alléou ; Gourlaouen.

kaoud fizians



En-dra m'edo an oll war héd anezañ, ar bloaz nevez a zo deuet adarre, d'e boent.

Deuet eo, sammet euz hon enkrezoù a dud, méd, o tougen, dindan plegou e vante'l, bokedig kaer an esperañs.

Ha sellet ho-peus-ouez mêziou Breiz ? Gand an êzenn glouar hag ar glao puilh, ar bleuniou lann a zo digoret war hor hleuniou. Skedi a reont evel stered, hag e kreiz ar goañv, ez eus ganto dija kelou an nevez-amzer. Prezeg a reont deom, en o giz, kaoud fiziañs.

Kaoud fiziañs, ha n'eo ket talvoudusa kentel a ro deom deiziou kenta eur bloaz nevez ?

Kaoud fiziañs er boan a gemerom, hag el labour a reom amañ, evid sikour hor henvroiz da anaoud ha da gared atao gwelloc'h ene ha spered Breiz.

D'ar re a welom, hirio, war zigarez mad ar feiz, pe diorren gwelloc'h an den, o vruzuna hag o skuba kuit euz kalon hor henvroiz ar pez a stag anezo ouz o amzer dremenet, koulz ha d'ar re a labour a-grenn da ziazeza Breiz en diavêz ar feiz kristen, ni ' zalho da lavared n'ez eont ket gand en hent mad :

**« An neb na zent ket ouz ar stur
ouz ar garreg a yelo sur... »**

Ar stur, evidom, eo Vikel Jezuz Krist, na baouez, beb gwech, p'en-devez tro, da ziskleria d'an dud evel d'ar poblou, pegem talvouduz eo dezo mired en o haer, an oll binvidigeziou spered, deuet dezo a-berz o ouenn.

Ar pez a fell deom divenn amañ, dreist peb tra, eo ar Brezoneg hag ar Feiz : herez sakr ar zent koz hag ar re oll o-deus baleet war o roudou.

Dirag ehonder al labour, meur a hini a goll kalon hag a dro kein...

Abalamour m'eo diazezet stard ar feiz kristen en hor hreiz, e talhom ive da gaoud fiziañs...

N'emaom ket hon-unan.

Pa vez poaniet, ha greet gwella ma vez gellet, pa vez greet mad ar bedenn, neuze e heller chom dineh.

War an douar-mañ, Doue n'e-neus ket prometet deom ar gounid hag an treh. Prometet e-neus deom E hras. Hag ar hras-se a vezo kreñv a-walh evid hor skora, evid pellaad diouzom an enkreiz. Hor Breiz-lzel a garom a zo muioh labour daouarn an Aotrou Doue eged labour daouarn an dud. Eul lodenñ eo euz Iliz Hor Salver. Pa glaskom he mired en he haer, Doue ne hell ket hon dilezel...

M'hor-bezo fiziañs en E hras, fiziañs ennom hon-unan, e-pad ar bloaz nevez, setu an doare surra evid ma tougo hol labouriou frouez mad.

L. B.

an aotrou f. falc'hun

aluzenner-meur ar bleun-brug

D'an 12 a viz Kerzu 1943 e oe drouglazet an aotrou Perrot, tad ar Bleun-Brug. E-pad 38 vloaz e-noa stourmet heb fallgaloni. An dervenn a rank beza pilet evid ma ve gellet muzulia he ment ; mervet a ranke ivez an ao. Perrot evid ma ve gellet muzulia e labour.

Réd e oa koulskoude kenderhel gand an ero. Ar gelaouenn « Feiz ha Breiz » a oe karget anezi an ao. Guivarc'h, aluzenner d'ar mare e skol Sant Sebastian e Landerne (« Semaine Religieuse » eskopti Kemper, 11 a viz C'hwevrer 1944).

Hag an emzao e-unan ? N'oa tro ebed da ober kendalhou e-keid ha ma padfe ar breiz ; méd an Aotrou 'n Eskob a fellas gantañ koulskoude envel eur rener nevez hag e lennom er « Semaine Religieuse », 10 a viz Meurzh 1944 : « Par décision de Monseigneur l'Evêque, M. le chanoine Favé, sous-directeur des Œuvres, est nommé directeur du Bleun-Brug, en remplacement de M. Perrot ». N'eo ket **rener** (directeur) oa ar gêr mad, méd kentoh **beleg-kuzul**.

Anzao a rankan n'em-oa asantet neméd evid gortoz ma vefe kavet unan bennag all muioh a amzer dezañ — ha pa ne ve kén !

Dond a reas bloaveziou teñval evid an emzao breizeg ; kement hini e-noa labouret evid Breiz hag ar brezoneg a oe klasket afer outañ. E miz Gwengo'o an ao. James Bouillé, rener ar Bleun-Brug a oe toullbahet ha ne oe roet dezañ e frankiz neméd d'ar 16 a viz C'hwevrer 1945. N'oa ket deread klask en em jacha kuit d'ar mare-ze !

Er bloavezh 1948, an ao. Libéral, medisin e Kastell-Paol, anvet da rener ar Bleun-Brug, — an ao. Bouillé a oa eet d'an anaon — a gredas sevel endro er vann banniel ar Bleun-Brug e Kendalh Kastell-Paol... Ha setu digoret eun ero nevez... war gaeraad eo eet an traou abaoe.

Pell 'zo em-oa c'hoant e teufe eur beleg all em 'flas ; bremañ oa deut ar mare pa oa sioul peb tra. Bez e oa aluzennerien e peb eskopti hag an ao. Bihan am skoazelle a-hend-all. Méd piou da lakaad e-giz aluzenner-meur ? Bez e oa an ao. Falc'hun, kelenner e Skol-Veur Roazon ; méd gand e labour, gand e yehed !... Kuzul-ren ar Bleun-Brug, bodet e Gourin, a oe a-du evid ma vefe goulennet digantañ. Oll eskibien Breiz, an ao. Kardinal Roques en o 'fenn, a gavas mad an dibab ; an ao. Falc'hun a asantas ha setu penaoz on-eus bremañ eun aluzenner meur nevez.



Ganet e-kreiz ar brezoneg, e parrez ar Vourh-Wenn, an ao. Falc'hun ne ouie neméd brezoneg pa 'z eas d'ar skola : ar brezoneg eo bet e yez kenta. E skolaj Lesneven e kavas an ao. Batany e-giz kelenner ha gantañ eo e teuas da gared Breiz hag ar brezoneg. Mond a reas da gloerdi braz Kemper. N'oa ket kaer e yehed hag e rankas mond da zanatorium Thorenc (1933-1934) ; beleget e oe e Nice. Torret war e gleñved e

hellas kemered eur garg a aluzenner e Yerres, e-kichen Villeneuve-Saint-Georges. Eur plasig da ziskuiza? Ya, hag ouspenn da studia a nevez ; e spered digor n'helle ket chom dilabour. Da studia petra ? ar pezh a oa en e hoant, ar brezoneg ha kement a zelle ouz ar brezoneg. Tu a gavas da vond d'ar skol gand mistri vraz war ar yezou keltieg evel Vendryes ha war ar zonoriez (pe fonetik). Etre 1934 ha 1941 e chomas e Yerres hag e teuas gantañ : Licence de Français, Latin, Grec ; Diplôme de l'Institut de Phonétique ; Certificat de grammaire comparée des Langues celtiques. Evid mond avansoh gand e studiou oa réd dezañ mond da Bariz, méd re galed e oa ar vuhez er gêr-benn hag etre 1942 ha 1945 e kavom anezañ aluzenner e Antony ; ahano e helle darempred êz a-walh ar skoliou-meur.

Deg vloaz 'zo emañ o labourad : eur spered lemm a zo gouest da zanailha kalz a zeskadurezh e deg vloaz ! Er bloavezh 1945 e teuas da veza mestr d'e dro. Anvet e oe e Skol-Veur Roazon evel « chargé de cours » da gelenn an danvez e-noa studiet. Koulskoude n'e-noa ket c'hoaz tremenet e arnodenn evid beza doktor ; koulskoude e touge ar zae zu... n'eo ket aze abegou evid digeri dirazañ kadoriou- kelenn eur skol-veur a-berz stad, nann, neméd e ouiziegezh, anavezad mad e Pariz hag e Roazon, a daolas d'an traoñ peb skoilh.

Hag adarre d'al labour e-serr kelenn. Ar bloavezh 1951 a oe bloavezh e dezerenn. Ranket em-oa mond evel just da Roazon da geñver an derveze. An Aotrou 'n Eskob a oa ivez, an ao. Batany, fouge ennañ gand e ziskibl, hag eur bern tud. Dirag Vendryes e-unan eo e tivennas e labour, hag an dén gouiziezh a zisklerias e vez e buhez an dén, a-wechou, dervezeziou a levez, pa wel e ziskibien o vond pelloh egetañ gand ar skiant eo bet e-unan o studia hir amzer. Loreet e oe an ao. Falc'hun evel doktor gand ar meneg enoruz kenañ hag anvet mestr-kelenner (professeur) en taol-mañ.

Abaoe pevar bloaz e-neus poaniet muioh c'hoaz war ar fonetik ; bremañ e hello en em rei muioh adarre d'ar yezou keltieg ha d'ar brezoneg. Dizamet eo bet ivez, o veza ma 'z eus bet roet dezañ, eun nebeud bloaveziou a zo, eur helenner all d'e zikour, an ao. Trepos.

Evid ar wech e-neus bet heuliet labouriou ar Bleun-Brug ha skoazellet e renerien. Diwar vremañ e hello rei muioh a zikour.

Poan braz e-neus kemeret evid aoza eun doare-skriva nevez, êsoh e peb doare, tostoh da vrezoneg Gwened, tostoh da lezennou ar fonetik.

N'hellem ket kaoud beleg ampartoh ebéd da lakaad evel kuzul ar Bleun-Brug. Bennoz Doue dezañ da veza lavared ya.

Klasket em-eus em levraoueg ar skridou e-neus embannet an ao. Falc'hun. Marteze n'eo ket c'hoaz diouz o niver eo mond dezo, méd diouz o fouez a ouiziegezh.

1938 — Etudes celtiques, Décembre : **Recherches sur la sonorité des groupes consonantiques en breton.**

1942 — Conférences universitaires de Bretagne : **La langue bretonne et la linguistique moderne.**

1943 — Idem : **Une mission de folklore musical en Basse-Bretagne.**

1943 — SAV ; niv. 26-37 : **Kemmaduriou kensonennou ar brezoneg.**

1948 — Annales de Bretagne : **La toponymie nautique des côtes bretonnes.**

1948 — Idem : **L'influence romane et la répartition géographique des infinitifs en -a, -o, -i du breton.**

1948 — Onomastica : **Une enquête toponymique en Bretagne celtique : le cadastre de la Basse-Bretagne.**

1950 — Mémoires de la Soc. d'Hist. et d'Arch. de Bret., tome 30 : **L'influence des routes sur la situation des langues et dialectes en Bretagne.**

1951 — **L'histoire de la langue bretonne d'après la géographie linguistique.**

1951 — **Le système consonantique du Breton avec une étude comparative de Phonétique expérimentale.**

1953 — Annales de Bretagne : **Autour de l'orthographe bretonne. Positions et propositions.**

V. Favé.



an askol gwenn

Eur bouchad askol gwenn
A zaskrén tost d'an ti.

Darn anezo en o hoazez,
Vel c'hoarezed krog o neza,
Darn anezo war o daoulin
Krog o pedi 'vel gwerhezed...

Ar gouerien hroz, everien sistr,
Ne verzont tra, ne welont ket,
O vond, o tond ponner o 'fenn,
An askol gwenn, maouezed mistr,

'Zo darn azezet o neza.
Darn all daoulinet o pedi,
Er waremm voan, e-tal an ti...

Reun ar Mough.

mouez an tad

Rouez braz eo gweled, ma 'z eus bet gwelet, eur familh niveruz ha ne ve ket enni beb an amzer, etre ar vugale vihan, dizemgleo ha tabut. Unan a gemer e vraoig digand egile, ha setu youh, daelou ha taoliou.

Med ma vez an tad war al leh, e seller diou wech araog skei. D'an oll, gourdrouz an tad a zo eur binijenn galed, hag hini ne gred enebi pell outañ pa lavar e pe leh ha gand piou ema ar gwir, ha piou a zo kabluz.

Evel-se e tremen an traou e-touez bugale vihan savet mad. Hag e-touez bugale vraz savet fall ?

Ar broadou a zo greet gand tud ha n'int nemed bugale vraz, lod savet gweloh, lod all failig a-walh, zoken euz ar renerien a vez e penn. Trouz a vez aliez etrezo, dreist-oll etre renerien euz an eil bro d'eben. Trouz hag a goust ker d'an dud dister, ar beurien, al labourerien, ar vugale, ar glañvourien, ar re goz ; d'an oll e gwirionez.

Oll, mad ha fall, renerien hag all, ez int bugale da Zoue, ha bugale d'an hini a zalh e bls war an douar-mañ, On Tad Santel ar Pab.

Hag On Tad Santel ar Pab a zo o tond euz a hourdrouz e vugale.

N'e-neus ket lavaret da renerien ar Rusi ez int muntrerien euzuz hag a zo eun dizenor evid o bro hag evid ar bed a-bez. N'e-neus ket lavaret da renerien ar Frañs ha Bro-Zaoz ez int bet tud diboeil o sacha ar harr war o hein en Ejipt, na d'ar broiou all a ra dezo rebechou c'hwero n'int ket tamm ebed gweloh na furroh. An Tad n'e-neus anvet hini ebed euz ar vugale e-neuz gourdrouzet. Ha kouiskoude, peb hini, gand e oberou fall, a zo bet skeudennet ken frêz ma n'eus bet den ebed evid fañza war ar pezh a oa evitañ, hag ar pezh a oa evid ar re all. Hag an oll o-deus pleget o 'fenn. Oll nemed ar vuntrerien, a gred chom c'hoaz e lez-varn an O.N.U. Med ranket o-deus kleved n'ema mui o 'flas eno, hag ar re all, ne dlijent ket o gouzañv pelloh e-touez divennourien ar gwir.

N'eus bet anvet nemed ar bobl merzeriet. Ar Pab e-neus diskouezet, n'eo ket hebken e garantez eviti, med e anaoudegez vad evid an oll dud onest euz ar bed a zo deuet war zikour an Hongri.

Lizer Nedeleg On Tad Santel ar Pab e-neus greet trouz, ha vad, n'eo ket hebken e-touez ar gatoliked, med ive er broiou protestant ha paian, e kement leh e zeus tud onest. Deuet eo evel eur steredenn gaer e kreiz an noz da ziskouez an hent d'ar re a oa kollet, d'o hench war-zu kraouig Bethlehem, al leh nemetañ a heñ beza evidom, dre ar Mabig Jezuz, eun eienenn a beoh hag a eürusted.

Eur sklerijenn peurbaduz a deu euz al lizer-ze, eur sklerijenn hag a dal evid peb amzer ha peb bro. Ne ve ket diêz deom diskouez drezañ petra 've da reiza e Breiz-Izel ive, e kudennou ha n'edont ket moarvad e spered ar Pab d'an ampoent ma skrive. A-walh eo d'an heol lugerni evid lakaad da zarevi frouez disheñvel e peb leh. Ha peb spered den a heñ soñjal e traou disheñvel o lenn ar pennad a roan eun diverra anezañ evel-henn :

« Brazder an den en deiz hirio, war o mēno, eo beza gouest, dre e ouiziegez, da groui eur bed nevez heb kaoud ezomm euz kenteliou an amzer dremenet. An amzer dremenet, dre voazamanchou a beb seurt, dre ar relijion dreist-oll, emezo, n'eo mad nemed d'e stroba pa glask ober gwelloc'h. An den-hirio, l'orh ennañ o veva er bed evel en eun ti emañ o sevel evitañ e-unan, a fell dezañ beza krouer. N'e-neus doujañs ebed ken evid an amzer dremenet. Hirio e kred eo gouest da lakaad peb tra da blega dirazañ. Ha pa stag da glask gwellaad doare an dud da veva, doare ar zosiete, e ra dezi evel d'eur mekanik hag a hellfed da freuzo, tamm ha tamm, ha da reñka evid mond en dro en eur hiz nevez. »

« Med an dud n'eo ket traou int. En em vodet hag en em strollet int hervez boazamanchou bet degemeret a nebeudou a-hed ar hantve-jou. Ha n'eo nemed war diazezo stard an amzer dremenet eo e chom divrall ar savaduriou nevez evid an amzer da zond. »

« Dizouezennou kaled a zo o hed al re a fell dezo aoza an amzer da zond heb anqoud an amzer dremenet. Diwriziennet euz e voazaman-chou beo ha yah, an den a zo evel eur wezenn ha ne grog ket en douar nevez m'eo lakēt ennañ dre froudenn, ha ne ra nemed dizeha e-leh rei ar frouez kaeroh gedet diouti. »

Gou'ennom na vo diwriziennet poblad tud ebed. Mirom ive na vo kendalhet da ziwrizienna ar Vretoned, ha da ober anezo tud estren en o bro. Ar gwez gwiziennet don ha stard eo a ro ar bleuñ kaerra, ar frouez gwella.

F. Falc'hun.

goulennit raktal digand :

« Fondation Culturelle Bretonne »

Boîte Postale 17, Brest, C.C.P. 380.96 Rennes :

LEXIQUE BRETON-FRANÇAIS et FRANÇAIS-BRETON
(Stephan-Seite), 330 francs, franco.

L'ORTHOGRAPHE UNIVERSITAIRE de la LANGUE BRETONNE
(Falc'hun-Dujardin), 180 francs, franco.

KOMZOM, LENNOM, HA SKRIVOM BREZONEG
(D^r Tricoire), 280 francs, franco.

MOJENNOU AR MOR (Pierre Helias)

éditions Jos Le Doare, 280 francs franco.

saout lambaol

Rondel goz sandrione

Va mamm a oa chomet intanvez abred. Gwechall n'oa ket brao stad an intanvezed. Bremañ n'eo ket heñvel ; ha bez' eus merhed, o weled t'iez nevez ha buhez kaer an intanvezed, hag o-deus mall e teufe o zro da veza evelto. O ! n'hel lavaront ket, èz deoh gouzoud.

An traou kuzeta a zo krouet eo ar hizier hag ar merhed.

Gwechall o stad a oa truezuz ! Skoazell ebéd euz a neb leh. O zud kaer o dileze, pa ne deuet ket da gerhad, war-lerh ar maro, an arrebeuri hag an traou all o-doa, emezo, nann roet, méd prestet. Va mamm a rankas mond da zervicha, evid sevel he minor bihan. Eun tachad oa bet en ospital e Gwitalmeze. Eno e oa mad kenañ eviti al leanezed, hag Anjelig, eur vaouez euz ar gwella, n'he-deus kén greez vad, héd he buhez, hag a ree leun a gamambre d'ar paour kèz minor.

Va, bet ez eus c'hoaz tud evel-se war an douar, tud ha na glaskont ket o eürus-ted o-unan, méd a daol, dre garantez evid Doue, bleuniou dudiuz a vadelez war o zro, bleuniou kaer a ray dezo er baradoz eur gurunenn hag a lakay souezet meur a hini !

Va mamm, bet plah tiegez, abaoe he daouzeg vloaz, a gemeras adarre he micher a wechall hag a yeas da Zandrione. Me a jomas gand va mamm-goz e bours Lambaol, méd pa oan deuet da veza brasohig, e teuen beb hañv da vevel bihan da Zandrione. An hañv a bade a-wechou pell, rag soñj am-eus da veza paket riou dindan ar barrou kazarh, e-pad ma sellen ouz va mamm o tenna panerz.

Méd eüruz oan ! Piou ne vije ket eüruz e-kichen e vamm ! Al leue bihan p'he gwel o tond er hraou en em lak da zañsal ha pa vez e-unan e leñv ! Eur bugel ivez, n'eus forz e peleh e vezo e vamm en em gavo brao en he hichen.

E Sandrione, war ar marhad, ar batronez a oa eur vaouez euz ar re wella ! Ne 'z in ket d'he lakaad war reñk ar zent, nann, méd kalon vad he-doa, ha ne lakaas kemm ebéd morse etre bugale an ti hag ar mevel bihan. P'e-neveze naon, e helle mond da gerhad eun tamm bara hag amann teo a veze ledet warnañ. « N'ez-peus ket a hoant da gaoud eur banne lèz evid e gas d'an traoñ, paotrig ? » Hag em-beze eur pechad skudellad !

D'al lun e veze starnet al louaj hag ar voetur evid mond da varhad Gwitalmeze. Da zadorn adarre en-dro evid mond da Lokournan. Ha beb tro, beb tro, e teue gand Marharid eur voeturad traou mad evid oll dud an ti. Rannet e zevent diouz an noz, ha pep hini a glaske eun neiz evid kuzad e lod. Hini ar vugale a veze atao brasoh.

Gwelet e veze oh en em gaoud war an daol sahadou avalou, braz evel sahadou gwiniz, ha pa zoñjan e Sandrione, ar pez a deu din da genta em spered eo c'hwez didanuz ha kennerzuz an avalou a zareve en armeliou war-laez.

Méd n'oa ket a-walh lonka traou mad, labourad a ranket ivez ! Ar minor bihan a oa lakeet da bastor saout. Leun a zaout a oa e Sandrione, me 'gav din diou-warnugent. Eur mellad taro a oa ivez en eur hraou e-kichen, hag eur gwall hini. Eun devez, Kola, pennfollet, a dorras e stagou, a zirollas. D'an daoulamm ez eas war-du Gwitalmeze. An dud en em lakaas gand kezeg war e lerh. A-benn ar fin evid e baka e oe ranket bonta an henchou gand koadennou. Gweled a ran c'hoaz Kola o tond endro, gleb dour teil, kignet e grohen, e fri leun wad, ruihennou houarn ennañ. Ar saout, dre hras Doue, n'oant ket kén droug.

Me a drémenas ganto deveziou ha deveziou er prajeier. Eur hi a veze ganin. Ar hi am-eus ankounac'haet e ano, méd ar saout ma ne vefent ket bet gwerzet pell 'zo d'ar higer em-befe gellet lakaad eun ano war benn pep hini anezo. Lod a zo chomet o foltred evel moulet e va spered.

Rondell, rouanez saout Sandrione, eur hagn a hini, a zistage taoliou diouz an daou benn, pa zoñjed an nebeuta. Penn-Brao : eur penn kaer he-doa, gwir eo, méd re a gamambre a ree. Atao e veze oh en em lipad, e-leh peuri. Lanniliz : eur penn-boud a vloh, me 'gave din e oa bouzar. Ne felle ket dezi klevet oa. Lambaol : n'oa ket heñvel an oll ouz ar saout am-oa anavezet ahont. Atao he-doa an èr génaouoq, hag he faz a oa pounner. Dond a dlle dezi euz a Lambaol-Guimilio, er vro-ze ez eus kement a hénauoeien !

Méd an hini a zo chomet aze beo dirazon, gand he hrohen melen, he herniel daoubleget, he lost hir beteg an douar, he zez spontuz, he daoulagad tener atao o tourenna, eo Rondell goz Sandrione.

Ar saout all a gomzan anezo a lakaan war an daolenn a enor o-deus greet eun dra bennag sebezuz e-pad o buhez. Rondell goz, hi n'he-deus kén greet nemed peuri, rei lèz, amann, leueou bihan da Varharid Sandrione. Eo ! Roet he-deus ivez he harantez a vloh d'ar vugale ha dreist-oll d'ar minor bihan a zo bet ouz he diwall, en he bloaveziou diweza. Hag abalamour da ze hirio eo lakeet ganin war ar reñk kenta ! Saout a vre-mañ, bezit mad e-keñver ar vugale a zo ouz ho tiwall. Ne ouezer dare morse petra

deuint da veza. Eun deiz, martezé, e skrivint ivez diwar ho penn, e lavarint : « O ! hounnez a oa eur fallakr a vloh » pe : « Ha, hounnez, avad, eur vloh euz ar gwella. » Ho prud vad pe fall a zo eun dra dalvouduz !

Ha c'hwi, tudou, kemerit skouer diwar ar saout ! Na daolit dismegañs morse war dén ebéd. Ar hoz tamm dén bihan, treud e weled, a zo aze en ho kichen, arabad deoh ober fae warnañ, nag ober goap anezañ. Doue a ro danvez da lod, da lod all e ro spered, hag eun dra leal eo ne ve ket roet an oll draou d'an hevelebr re ! Taolit evez, tudou ! Warhoaz marteze ho-po ezomm euz an hini oh bet yud evitañ, p'oa bihan ha paour. « Va mab, Aotrou, em-be c'hoant kaoud eun tammig taol skoaz evid e lakaad er porz... pe evid mond war eul lestr a genwerz. Ma skrivjeh eur gêr evitañ, e rafeh plijadur din. » Ne gredit ket kinnig dezañ eun anduilhenn. (Ha c'hoaz merhed Gwitalmeze, eun deiz, a ginnigas unan d'ar Pab, o soñjal, douetuz braz, e ve pardonet evel-se êsoh o gwall-deodadou.) Ne ginnig ket eun anduilhenn, rag gouzoud a rit mad e-neus arhant muioh egedoh da brena anduilh m'e-neus c'hoant.

Deh oa sounn ho kribell, taguz ho teod. Marteze zokén evid ar blijadur hebkén d'ober poan ho-peus chachet war skouarniou an hini a deuoñ hirio da zaoulina dirazañ.

Bazit eta karantezuz e-keñver an oll a vev en ho serr, ha n'ho-po ket da gaout keuz !

Olier eo a deue diouz ar mintin da gas ar saout d'ar prad. War gein e veze, eur foet gantañ, hag e strake. Ar saout a ranke bale buan, Rondell goz evel ar re all en eur vralla he zez !

Me a jome va-unan er prad. Ne ouien ket lenn c'hoaz ha gwell a ze, rag morse n'em-eus lennet traou dudiusoh eged el levr braz a oa dirag va daoulagad.

Me a heulle al laboused, o hanaouennou dispar. Lod a lavar e kanont atao heñvel. N'eo ket gwir ! Ouz o zelaou gand evez e weler e oar al laboused, hag an anevaled all, komz en eun doare disheñvel diouzom, méd kornz a reont. Mond a reen da baka raned en eun toull-kirin. Beb an amzer eur had en em gave a-benn-herr. Eur wech unan a lamm dreist kein eur vloh a yeas e breskin, an oll re all war he lerh, neméd Rondell goz.

Aliez eh huñvreen, moredet harp er haead lann. Nag oa dudiuze va huñvreou ! An istoriou koz am-oa klevet e Lanbaol e-kichen ar podadou a veve e va spered ha me 'gave din gweled leun a dud o vale er prajou beteg kouldri Lezkalvar. Ar houmoul en er gemere doareou listri, menezioù.

Eur béd nevez a zave a beb tu !

Eur vleujadenn am dihune ! Perag e vleuje Metig pe Melen ? Piou oar ? oh huñvreal edont ivez douetuz, rag peurl a oa e-leiz, dour forz pegement m'o-doa, sehed. D'ober petra en em glemm ?

Méd ar saout a zo diéz o hompren ! A-wechou e vezent sioul kenañ ha pa vezent teo a-walh e hourvezent. A-wechou all pa veze mogidell e kave dezo e oant kollet, abalamour ma ne welent ket ar re all. Neuze avad e vleujent. Devezioù a oa ne oa netra d'ober ganto. Dicustu p'en em gavent er prad eh en em lakeent d'ober o fenn diot. Tourtal a reent ar haeiou, an douar, en em dourtal a reent etrezo, en em lakaad a reent da drei en dro evel ar hezeg ouz an dornérez !

Eun deiz, me lavaras d'ar Rioualen, eur mevel koz hag e-noa gwelet ar strobinel-lou e-kichen ar poull dour-anvoez, pegen nehet e vezen derveziennou gand ar saout.

« Al loar eo a ra an dra-ze, a respontas din. Ar hizier zo heñvel, va faotr-me. N'ez-peus ket gwelet a-wechou, pa lakaaz an dorn war o hein, effennou tan o tond anezo ? Ar merhed ivez, va faotr-me, a-wechou e teu tan euz o bleo, pa lakaer an dorn war o fenn. Méd arabad ober an dra-ze dezo, rag o spered eo a ya kuit, ha n'o-deus ket kalz, va faotr-me, lez ganto an nebeudig o-deus ! »

Al loar, loar ar Rioualen, pa ne veze ket eet d'he log c'hoaz diouz ar beure, me a zelle outi. A-wechou e veze melen, a-wechou e veze rouz, a-wechou leun, a-wechou korniog ! Hag e klasken kompren penaoz e teu ar benveg souezuz-se da lakaad ar saout, ar merhed hag ar hizier da goll o skiant vad.

Ha ! dre hras Doue oan eur potr !

Koulskoude, koulskoude, Rondell goz ne ree morse he fenn fall. Hi ne zente ket ouz al loar. Atao e chome tost din. Me a lakae va breh war he gouzoug e-pad ma peure, rag n'oa ket braz ar vloh, me a gomze dezi goustad ; o nag a draou kaer am-eus lavaret da Rondell goz Sandrione !

D'ar pardaez pa veze poent mond d'ar gêr, Rondell goz a jome, anezi heh-unan, atao da ziweza.

Me a gemere he lost, hag a jache. A-ruzou me a yae bemdez evel-se, a-héd ar stréd voan beteg an hent braz. Koz oa, beh he-doa o vale gand he zez, ha koulskoude en eur zarra an drav er penn all, me a wele en he daoulagad laouen, oa euzuz da veza greet plijadur d'he mignon bihan.

Va mamm a veze o horo ar zaout. Eur vamm vad a die deski d'he bugale abred o hreañsou hag o fedennou. Hirio e klevet tud o lavared n'o-deus ket amzer da zeski katekiz d'o bugale ! Digareziou ! Ar saout a vez gorroet c'hoaz, ne vezont ket ? En eur horo ar saout eo e teskas din va mamm va fedennou. Ha gwechennou c'hoaz en eur lavared va fater, e kav din klevet muzik al lèz o koueza er sailhou !

E brezoneg ez ee mad an traou, méd e latin, Santez Anna venniget, nag a boan ! Koulskoude e ranken gouzoud e latin ivez. Va mamm ne ouie ket oa an hevelebr pedennou. N'he-doa ket desket a latin, ha n'oa tamm falloh abalamour d'an dra-ze, na me tamm gweloh abalamour ma m'eus henn desket abaoe.

Evid rei din nerz kalon e veze kinniget din beb an amzer eur banne lèz livriz, eonenn warnañ. O peger mad ! Koz on bremañ, méd pa hellen, e Sant-Pabu, paka en eur hraou eur banne lèz livriz e vezen kalz laouennoh eged gand eur banne gwin !

Giziou ar vugaleaj a jom atao... ha bez' eus tud diéz da zizona ! E-kreiz ar bommou latin, me a jome a-zav a-wechou hag a lavare : « O nag a lèz a zo adarre gand Rondell goz ! leun ar zailh, mamm ! »

Hag e konten pegen chentil oa bet evidon, héd an deiz, ar Rondell goz ! Me a yee da lakaad en he laouer diou rabezenn muioh eged d'ar re all, a lakee va breh war he skoaz, a ree allazig dezi, a zelle en eur vouse'hoarzin en he meleziou skler. « Kenavo warhoaz Rondell ! Ni hon-do plijadur adarre ! »

Ar Brun koz a lakee raden da zévi dindan ar pod braz. Moged a oa leun. Er gêr ivez e veze moged aliez. Poan a veze en daoulagad, méd ar moged a garien. Ganin e veze e peb leh c'hwez ar moged... evel gand an anduilh mad. Ar Brun en eur ober moged gand an tan ha gand e gorn, a gonte deom istoriou kaer a-wechall, a zalhin mad dezo héd va buhez.

« Eun aotrou, emezañ, e-noa leun a zaout, hag e kemeras eur mevel d'o diwall. Hemañ a oa bevet fall kenañ ha ne helle ket lavared d'e vestr e oa droug ennañ. A-hend-all e vije bet tennet dezañ korrenn.

— Petra eo tenna korrenn ?

« Korrenn, va faotr-me, a zo, gand eur gontell vraz, heñvel ouz hini al lazer moh Pêr Gerskivit, tenna eun tamm kig a zaou lur euz ar hein !

— O ! emeze, en eur ober eur skrijadenn.

— Peogwir edo e-giz-se ar stal, ar mevel ha ne houneze ket peadra da veva deread, ha da veva e vamm a oa eun intañvez paour, ar mevel, eun deiz, a werzas saout an aotrou d'eur marhadour o tremen hebiou eno.

O n'eo ket me am-bije greet an taol-ze da Varharid Sandrione, kén mad ha m'oa ouzin !

Neméd ar mevel a lavaras d'ar marhadour : « Krehin ha kerniel ar saout a ran-kan kaoud dioustu. »

Roet e oent dezañ. En o dispakas war beg eur wezenn, hag a yeas d'ar maner en eur youhal :

— Aotrou ! Aotrou ! Ho saout zo oll o vond d'ar Baradoz.

— Foultre ! Foultre ! eme an aotrou, en eur gemeroud e lunedou.

Hag o veza ma vez tokou braz o holo pennou goull, an aotrou a gredas.

Ar mevel a hellas, gand e vamm, goude, lakaad eun tammig lipig war e yod gwiniz du ! »

Ar zaout o vond d'ar Baradoz ! Ma vije bet eur baradoz evid ar saout, Rondell goz a vije bet eet war eun di, rag bieh evelti, morse n'am-eus gwelet.

Méd ar pezh on asur eo eet d'ar Baradoz Marharid Sandrione he mestrez. « Ar vad a rit d'ar paour a holo niver ar pehejou. Ar pezh a rit d'an disterra euz an dud, din-me eo her grit. »

N'eo ket me am-eus kavet ar homzou haer-ze, méd an hini emañ gantañ alhweziou dor an Neñv, hag e-neus degemeret gand eur mousc'hoarz Marharid Sandrione.

Mab an Dig.

DEGEMER MAD

An deiziou-mañ e teu dim eun nebeud refujidi a Vro-Hongri. En eul lenn ar helou e trid hor halonou gand kengarantez evid an nesa... hag e lezom hon nesa da zigeri e di d'an estren. Ni hon-unan ? Ober kemend-all ? Ya da, mar gellfem, méd n'hellom ket siwaz !

Perag n'hellom-ni ket ? Pa n'hon-eus gwele 'béd da ziouered, na frankiz a-walh da lakaad eur gwele ouspenn, netra d'ober é gwirionez. « Gweleou am-eus, plas a-walh ivez, a zoñj darn, méd degemer tud en eur hoz ti heb dour-réd, heb an ézamanchou modern ! Nann, degemer estrenien a zo mad evid bourhizien ; ni a garfe henn ober, méd méz hor-bije diskouez om c'hoaz war-lerh broiou 'zo evid an doare-beva. »

Hag a siziom er vourhizien.

Ar vourhizien — arabad e vefe henn ankounac'haad — n'int ket hebken tud o-deus o ézamanchou, méd ivez re aliez, tud a gar o ézamanchou, tud a em gar o-unan. Setu ma éhomo ar refujidi er-mêz pe e kavint goudor gand tud ha n'int ket kerkoulz ha c'hwil.

Hag a hini koulskoude a vije evurusoh ganeoh c'hwil eged e ti ar pinvidig. Daoust hag int bet pinvidig en o bro biskoaz ha dreist oll abaoe daouzeg vloaz m'emaint dindan kazell-yeo ar Rused, kén don er 'vizer m'o-deus kavet gwelloh sevel ouz o mistri hag o hanoliou eged gouzañv pelloh. Piou int ? Kouerien ha labourerien, ar peurvuia, tud n'o-deus ket bet o ézamanchou hag a vefe gwelloh ganto deg gyvech, ma hellfent dibab, debri patatez hag eva jistr en ho tiegez eged istr ha gwin koz e maner an aotrou.

Ar gredenn am-eus om techet evel pobl da gaoud méz euz hon doare-beva. Ha dre ze ne gredom ket rei d'an estren degemer mad en hon tiegeziou. Eur pevar bloaz 'zo bennag, edon e Liverpool en eur hendalh bodet ennañ pevar-ugent a dud deut euz pevar horn ar béd peogwir e oam euz eur pemp-warnu-gent bro bennag. E-touez ar re am-oe ar muia a blijadur o tarempredi, e oa eur Yougoslav a houlennas diganin eun noz bennag : « Livirit din 'ta perag eo kén diêz en ho pro lavared d'eun dén : deuit tre ? Tremenet ganin eun nebeud miziou en ho pro, e oan deut da voud mignon braz gand meur a hini. Deuit d'eva eur banne, a veze lavaret din ; d'an ostaleri evel just. Méd gwech ebéd n'eo bet kinniget din mond da dremen eun nozvez pe ziou e ti hemañ pe benhont. » Petra am-oa da respont ? Réd e oe din divenn enor bro va havell. Peurvuia, n'hon-eus sal-kibella ebéd ; réd da bep hini en em walhi er gegin... dre ze hon-eus diegi anzañ om warlerhidi ha ne bedom ket tud da zond davedom. — « O, eme va mignon Yougoslav, ha kaout 'ra deoh eo aze emañ an dalh ? Eun druez eo neuze, rag, flastret m'eo bet hor broiou gand brezellioù, me gav din ez eo heñvelig a-walh an traou e leh all. »

E miz gouere warlene, eun Amerikan yaouank a oa bet o studia e Roazon e-pad eur bloaz, a oa ganeom o koania evid ar wech diweza araog mond endro d'e vro en deiz war-lerh. An dour en e zaoulagad, eh anzavas ouzin : « Panevedoh n'hellfen ket lavared d'am henvroiz penaoz e vever en eun tiegez en tu-mañ d'ar mor. Dor all ebéd neméd ho hini n'am-eus kavet digor dirazon. Hemañ-henn 'neus kaset ahanon da bourmen gand e wreg hag eñ eur sulvez en e auto ; nompeseurt e-neus paeet eun aperitif din en ostaleri, ha setu an oll darempredou am-eus bet e-pad ar bloaz penn-da-benn. »

E Bro-Gembre, e Bro-Skoz, e Bro-Zaoz on bet pedet da vond da jom, eun nozvez amañ, eiz deiz du-hont, pemzeg deiz e ti Jones, teir sizun e ti Lloyd, gand tud ne oant ket pinvidig, tud na veze ket ganto war an daol meuziou eur pred-eured abalamour din. Eur vi ouspenn, eun delienn letuz hag eun domatezenn hag eur banne té. « La fortune du pot » : kemer chañs ar pod. Ya da, ar bomm-ze a vez klevet ivez en tu-mañ d'ar mor. An dro-lavar hon-eus er yéz, méd an dra e-unan a zo dianav. « O, emezoh d'ho kwreg, en eur erruoud er gêr euz ho labour, kleo 'ta. Pedet em-eus Hemañ-henn da zond da goania bremaig. Lavaret em-eus dezañ : 'vel e vo a vo ; kuit a ardou, evel just. »

Kerkent e lem ho kwreg he zavañjer hag e tilamm kuit da di ar higer : « O, n'ez eus némed soubenn ha restachou kreisteiz. Ha te, Jobig, ké d'ar hao daved eur voutailhad muskadig hag unan a Vourdel. »

Ha goude koan : « Jobig, arabad e vije dit pedi tud da goania re aliez. Koustuz eo. Santet e vez pa dosta fin ar miz ! »

Chañs ar pod end-eeun ! Gwall-chañs ar pod kentoh. Gwaz a ze evid ar mignon Hemañ-henn. Ho chervad a oa re vad ; ne lako mui e dreid en ti. Sed aze, a gredan-me, a ra d'an dud en em gloza warno o-unan, trei bourhiz heb goud dare, koll plijadur an darempredou beo, yah ha dilorh. Gwaz a ze evid ho mignon Hemañ-henn evid eur Yougoslav a garfe anavezoud ho tiegez, an Amerikan a gar ho pro, ar paour en harlu a garfe dond tre hag azeza e korn an oaled da domma ha da lakaad an tan war e gorn, gwell gantañ kant gwech eur banne dour da derri e zehed ha miroud tro da zond adarre eged gwella likeur en ho kao hag an nor prennet outañ kenta tro ma vo klevet trouz o votou.

Poent eo dim addeski kaoud mad an doare ma vevom ha soñjal : « evel-se e vez greet du-mañ ; ma plig deoh, deuit adarre ; degemeret e viot a galon vad ; en an' Doue. »

A. Koulouarn.

Roazon, miz Du 1956.

Gwenediz hag an doare-skriva nevez.

D'ar zul 6 a viz Genver ez eus bet bodadeg e Santez Anna gand an Aotrou Falc'hun hag ar gelennerien war ar brezoneg e Bro-Wened. Klasket o-deus, da vad, tostaad doare-skriva brezoneg Bro-Wened ouz hini ar brezoneg K. L. T.

Setu ar pezh a zo bet divizet :


Brezoneg Bro-Wened ne zegemero na — *c'h*, nag *ilh* med digemer a raio hiviziken :

- 1.) *y* e derou ar gêr e *yen*, *yod*, *yalh*...
- 2.) *w* dirag e hag *i*, warlerh *g* hag *h* da lavared eo : hwi, gwin, gwer, etc.
- 3.) *nn*, *ll* hag *rr* hervez an hevelezh reolennoù ha K. L. T. : *gwenn*, *gwell*, *hirroh*, etc...

4.) E dibenn ar gêrioù e heulio, reolennoù doare-skriva nevez K. L. T. : *mad*, *droug*, *braz*.

5.) E leh dihunamb, genomb, e vo skrivet hiviziken dihunam, genom : evel *dihunom* ha *ganeom* e K. L. T. eleh *dihunomp* ha *ganeomp*.

Setu greet eun gammed vraz evid tostaad an daou zoare-skriva.



EUR HANAL SUEZ 3500 vloaz zo !

Techet e vezom dallmad da gredi e-neus kroget peb tra gand on amzer-ni. Me a grede, ha c'hwi ive marteze, e oa bet ano euz eur hanal etre ar Mor Kreizdour hag ar Mor Ruz, evid ar wech kenta, kant vloaz zo hebken, pa oa deuet ar henverz war vor da greski kement ha da lakaad kalz batimañchou da vond ha da zond etre an Europ hag ar Reter Pellañ.

E gwirionez, kudenn eur seurt kanal n'eo ket eur gudenn nevez, na tost ! A zo koantoh, eur gudenn eo hag a zo bet meur a wech ano anezi e istor ar bed abaoe 3500 vloaz. Fiziañs am -eus e vich laouen o klevoud kelou euz kement-se.

Mil pemp kant vloaz kent on Salver.

Ya, tudou, 1500 vloaz araog ginivelez Jezuz-Krist eo e krog istor ar hanal. Kement-se a ouzom bremañ, pa'z eo an dud desket deuet a-benn da lenn an hieroglifou (skritur koz an ejiptiz), da heul Champollion a ziskulias alhwez seurt arouezioù iskiñ er bloaz-1799.

Gouez d'an hieroglifou-ze ha d'ar skeudennou bet skizellet war ar batimañchou ejiptad, edo ar rouanez Hatchepsout o ren abaoe nao bloaz war Vro-Ejipt, er bloavezh 1495 kent on Salver, pa oe lakët al listri kenta da vond war eur hanal kleuziet nevez oa, etre genou ar stêr Nil hag ar Mor Ruz. « Ta tenat » a veze grêt euz ar hanal-ze gand an Ejiptiz. An doue Amoun an hini eo e-noa gourhemennet d'ar rouanez lakaad toulla ar hanal-ze. E-giz-se e lavare-hi, bepred ; nemed e felle dezi klask krêski he galloud ive, na petra'ta ! N'eus forz pennozh, da gefiver gouelioù digoradur ar hanal, edo skeudenn an doue Amoun e kichen hini ar rouanez Hatchepsout, war unan euz ar pemp pikol lestr e kemer perz er gouel. N'edo ket ar rouanez heh-unan war vourd ar batimant, ayad. Re riskluz e vije bet ive, peogwir edo al listri o vond d'ober brezel war an aot arabeg, dindan diouaskell an doue hag ar rouanez.

Evel a welit war ar gartenn, kanal ar rouanez Hatchepsout ne oa ket kleuziet el leh m'ema kanal Suez hizio an deiz. Kleuziet e oa bet er goueleh (en dezerv), etre lost ar Mor Ruz (nepell diouz Suez) ha ker v-Boubastis, savet

war bord unan euz seiz aber ar ster Nil. Al listri ne hallent ket mond war-éun euz Boubastis d'ar Mor Kreizdour, avad : dao e oa dezo mond da dapoud aber ledanna an Nil.

Ar faraon Thoumosis III a reas implij euz ar hanal evid ar brezel ive. E zoudarded a oa o stourm e Bro-Siri. Dre ar hanal « ta tenat », e hallas kas soudarded all da goueza war gein an enebour.

Ouzpenn-ze, an Ejiptiz a denne implij euz o hanal, sur awalh, evid dégas ar hovev a veze tennet ganto e menezioù ar Sinai. Rag, an Ejiptiz eo o-doa diskuliet ar metal melen-ze evid ar wech kenta, 200 vloaz abretoh. (Araog, n'e veze grêt nemed gand koad ha mein ; hag an houarn n'eo ket diskuliet — gand an Ejiptiz ive — nemed 1.200 vloaz diwezath).

Ma ne vije ket bet stanket ar Hanal gant trez ar Goueleh...

Trêz ar goueleh, dégaset gand an avel, e stankas ar hanal tamm-ha-tamm. 600 vloaz kent on Salver, evelato, e fellas d'ar faraon Necho II digori ar « ta tenat » adarre. Kuzulierien ar roue ne oant ket a-du. Setu ma oe goulennet e ali digand an doue Amoun. Hemañ a respontas « Nann ». Ne oe ket adkleuziet ar hanal eta. Eüruzamant. Rag, eun tammig diwezath e klaskas Naboukodonozor, ar roue brudet euz Babilon, aloubi Bro-Ejipt. Ar goueleh eo a warezas an Ejiptiz, pezh na vije ket c'hoarvezet ma vije bet eur hanal o treuzi anezañ.

Ar Hanal adkleuziet gand ar Roue Persad Darius (500 vloaz K.O.S.).

Kant vloaz diwezath, eur roue euz ar Pers, Darius e ano, a voe treh d'ar goueleh hag a aloubas Bro-Ejipt, evid staga an Ejipt ouz ar Pers, e lakaas milierou a dud dilabour da adkleuzia kanal ar rouanez Hatchepsout. Ar hanal nevez a badas 400 vloaz. Stanket e oe gand trêz ar goueleh d'e dro avad, e amzer ar rouanez vrudet Kleopatra.

An Arabed o kleuzia ar Hanal d'o zro (800 vloaz goude on Salver).

Pa oe an Arabed deuet a-benn da veza mistri war Vro-Ejipt, en naoved (mil bloaz zo abaoe), e fellas diouzu d'o roue, ar Halif Omar, adkleuzia ar hanal stanket gand an trêz. Hag e oe grêt. Koulskoude, ne oe ket, ar wech-mañ, evid lakaad listri-brezel da vond drezañ, evid kas-dégas an ed gand listri bihan, ne lavaran ket. Evel beb tro, an « ta tenat » a oe stanket gand an trêz dégaset gand an avel, ha n'eo ket bet digoret endro.

Napoleon e-noa sonjet ive...

Napoleon, pa edo o stourm e Bro-Ejipt, e-noa grêt e zoñj digeri eur hanal etre ar Mor Kreizdour hag ar Mor Ruz, hag e-noa lakët ijinourien da zelled piz ouz an traou. Ar re-mañ, avad, a gavas dezo ne oa ket posubl kas seurt labour da benn, o veza ma oa gorre an dour er Mor Ruz 8 metr uhelloc eged er Mor Kreizdour, emezo. Hag an impalaer a gredas an ijinourien, o veza ma n'e-noa klevet kelou ebet euz kanal ar rouanez Hatchepsout. Setu ma oe red gortoz Ferdinand de Lesseps evid digeri, etre ar bloazioù 1859 ha 1869, ar hanal Suez a zo anavezet mad gand martoloded Breiz.

Goude trez ar Goueleh, listri goueledet.

Tonket eo an oll gánaliou oh eren ar Mor Kreizdour gand ar Mor Ruz da veza stanket gand tra pe dra, evid doare !

Rag, evel a ouzoh, ma n'eo ket bet trêz ar goueleh evid stanka kanal Lesseps, ar batimañchou bet goueledet nevez zo gand ar Holonel Nasser o-deus grêt kemend-all. Hag eur wech ouzpenn emeur o tistanka ar hanal ! Evid ar pevare gwech abaoe 3.500 vloaz ma oe digoret eur hanal evid ar wech kenta. Gand ma vo ar wech diweza !

Doktor J. Tricoire.

Taol an oferenn

Ar Vretoned, int-i hag o deus en o bro kement a savadurioù hag a obereñnoù relijiel, d'ezo eur wir dalvoudegez arzel, a dlefe beza prederiet gant kudennoù an Arz Sakr, da genta evit skarza didruez eus o lec'hioù santel breinadurez plastr livet Sant-Sulpiz, d'an eil evit kendalc'h er bed a-vremañ labour o Zadou.

Menoziou ar pennad-mañ a zo kutuilhet er gelaouen c'hall « L'Art Sacré » niverenn Du-Kerzu 1955. Savet en he fez diwar-benn an aoter.

An aoter n'eo ket hepken eun dra ret evit an azeulerez (adorasion). An aoter a zo eur *mister*. Ar Bibl a lavar deomp hon eus an tu da gaout dreizi distaol ar pec'hedou ha da zistroi e kenunvaniez an Doue Peursantel. An aoter a zo eul lec'h, e c'hallomp erruont ennañ gant Bezañs pe Prezans spontus an Uhel-Dreist. Met, awenet gant Sant Paol, o kelen : « Ar roc'h e oa ar C'hrist » Tadou an Iliz o deus *gwelet en daol-aoter ar C'hrist Jezuz e-unan*.

Korf ha Gwad an Aotrou eo kreizenn ar Sakramantou. Evit ober ar sakramant-se, ar gristenien *en em vod, en em unan* er garantez. An iliz a zo saveñ evit degemer ar strollad-se, evit boda ha boda evit eur banvez, eur pred, eur sakrifis. Eun iliz ha ne vod ket en-dro d'an aoter, ha ne dosta ket, zoken dreizi he-unan, ar re a zo enni, ha ne skeudenn ket unvaniez ar re a bed, a selaou hag o ginnig enni, a zo eun iliz savet fall.

An aoter eo *kreizenn* ar savadur a-bez. *Braster an iliz a vezo hervez an aoter ha stumm an aoter a vezo diouz korf an iliz*. Taol ar c'hinnig a dle klota gant ar savadur a-bez. An traou-ko, ar c'hlinkladur, ar fichèrèz, ar galon ne dleont ket blenia ar saverien. Diazezet, stummet e tle beza hervez an danvez, ar sklerijenn, al liou, al lec'h, hervez ar strollad kristen a raio ganti. Eun iliz-veur, eun iliz-menec'h, eun iliz-parrez, eun iliz-pirc'hirinaj a vod strolladou disheñvel. An Ao. Bouille ha Y.-V. Perrot o kizella chapel Koadkeo gant he aoter diavaez ne oant ket speredou diwar-lerc'h.

Ret eo eta prederia, soñjal, hag arabat beza poulzet gant menozioù rak-diwanet, nann-pouezet, hag ober evel-se ar pez n'eo ket ret ober. An aoter e-gwir a zo eun daol met se n'eo ket eun digarez bras-awalc'h evit diskar bez doujet eur sant. Hag en abeg ma' z' eo an aoter eur bez, droc'h e vefe stalia eul laouer-véz c'houllo war eur savenn simant. Amañ an oferenn a c'hall beza lidet dirak ar bobl, ahont, se ne vezo ket ken pouezus.

Mat eo sklerijenna ar saver, met ret eo goudeze eñ lezel da oberia, rak eñ hepken a c'hall *lakaat an aoter da glota gant braster an iliz*.

An aoter vras eo ar *c'henta tra* en iliz : d'ez i al lec'h gwella, al lec'h a enor, al lec'h a c'hall beza tizet gant daoulagad an holl. Ret eo dezi beza dreist an aoterioù bihan. Dre he staliadur war an uhel hag e-kreiz, dre he sklerijennadur, dre an danvez implijet, dre veurded ar groaz, hag ar c'hantolorioù. Devosion hiniennou evit eur sant pe evit misterioù ar C'hrist n'eo ket eun abeg evit sevel eun aoter nevez. Dre e-leiz a draou all ouspenn aoterioù, e c'haller enori ar Sent ha misterioù hor Salver.

Ar *mean* eo ar gwella danvez : seveni a ra kelennadurez ar Bibl Santel. E mengleuzioù Breiz ez eus eur mean eus ar c'haera. Met bez e c'haller ober ivez gant ar c'hoad, ar pri poaz... An aoter eo ar C'hrist, bez e c'haller eta klinkla an daol-se gant *holl binvidigez* an iliz. Bez e c'hall ivez beza disteroe'h, noasoe'h, paouroe'h, met *morse an dañvez ne dle beza divalo*. Ar c'hoad a vezo bepred koad a-briz, da skouer, dero en hor Breiz, dibabet ha labouret mat.

Pell diouti ar fichèrèz marc'had-mat, ar c'hinkladurioù daou-wenneg, an traouigoù. An aoter a dle beza *meur* (solennel) *kaer dre he danvez* ; n'eo ket graet evit kinkla eun iliz.

Lodenn ar santual, ar santual eo an lec'h ennañ an aoter hag an aoter he-unan), o kendalc'h ar *Santela* (Le Saint des Saints) e Neved Jeruzalem, a dle beza *disrannet* diouz lodennall an iliz. Gouzout a reomp koulskoude he deus al Lezenn Nevez roget ar gouel-disranner. Eun Doue kemeret gantañ eur c'horf-den en deus diazezet an Iliz, hag ar C'hrist a zo en hon touez en Eucharistia. An dud fidel a dle eta *konomia gant ar santual, darempredi an aoter*.

Evit merka ez eo al lec'h santela eun dachenn miret, e saver *klouedou*, drafou, a bep seurt etre ar santual hag ar c'horf-iliz : ar speurenn-taolennou bizantinat (iconostase) an daol santel latin. Eun doare all da lakaat disheñvelidigez a zo c'hoaz, eun doare deuet eus Bizañs : an aoter a zo gwaskedet gant eur *savadurig (ciborium)* stumm eur volz war bevar piler, evel ma vez gwelet e Iliz-Veur Kemper evit aoter an eskob, met ar seurt daes-mañ a harz alies ouz al lidou d'en em zisplega evel ma z'eo ret. Hirio, evit roi meurded d'an aoter, e ledannaer an derezioù hag e *stigner a-us eun tamm dañvez*, evel ma vez gwelet dreist-holl e ilizou nevez ar Suiz alamanek. Echu eo eta s'aga ouz penn an iliz eur savadurig, doare eur c'hustod (niche), evel santual. Pe ne verk ket ez eo an « Eukaristia » eul *lid a genunvaniez, eun aberz a veulcudi, tra an holl dud fidel*. Ar Santual a raio eta korf gant an iliz, a *vezo unan* gant an iliz, met bez e vezo *diskén vel diouz an iliz-se en eun doare speredel*.

Bez e c'haller ivez *sklerijenna ar Santual en eun doare disheñvel* : Sklaerder o tont a-gostez a seblant beza ar gwella sklerijennadur.

Taol ar gomunion ne dle ket beza eur speurennig teñval e're ar santual hag an neo-iliz. Ober d'an daol santel stumm eun daol a vefe fall rak ne vez lakaet netra warni : n'eo mui nemet eun harp evit ar re a ya da gomunia gant korf an Aotrou Krist.

Anat eo, gant nebeutoc'h a arc'hant, kalz a nerz-kalon hag a vlaz-reiz e c'haller sevel oberennou dellezek a evez.

Moualc'h ar Sklerder.



BLOAVEZ MAD

Koz ha yaouank, gwitibunan
Bloavez mad deoh a reketan,
Dilhad didoull war ho tiskoaz,
Labour didorr, yod silet poaz,
Kerh ha gwiniz leiz an irhier,
Kaol ha panez er parkeier,
Krapouez lardet a gorfajou,
Kig ha farz a grabanajou,
Amann melen leiz ar ribot,
Da gousked beb a wela blot.
Eul lomm gwin-ardant d'ar wazed
Eun tasad kafe d'ar merhed,
Hed ar vuhez, kalon laouen,
Hag en neñv, beb a gurunenn.

Kanaouennou Kerne

an Ao. Quere.

KELEIER

AN AOTROU PAUL LE FLEM

« Officier de la Légion d'Honneur ».

Gand plijadur eo hon-eus lennet war ar helaouennou ez eo bet anvet ar muzisian brudet Paul Le Flem da ofiser al « Légion d'Honneur ». Anavezet mad eo e Breiz evel en Europ a-bez, hag e oberennou dudiuz a zach muioh mui evez ar re a gar ar sonèrèz kaer. Hogen, ar Vretoned a zalho soñj da viken euz ar garantez e-neus diskouezet bepred evid e vro hag he hanaouennou koz. D'eur mare ma ra tud 'zo fae war deñzorïou hon tadou ha war gened hor Breiz, an Ao. Paul Le Flem a lavar dre gomz ha dre ober pegen don ez eo awenet gand Breiz ha toniou Breiz, evel m'e-noa greet en e raog meur a zonzozour braz. « Bleun-Brug » a zalho soñj ivez euz ar skoazell ken prizius roet gand an Ao. Paul Le Flem da geñver Skol-Hañv Kastell-Paol, 1956, hag a ginnig gand doujañs gourhemennou ar « Vleun-Brugerien » d'an arzour braz e-neus karet hag enoret ken kaloneg e vro.

13^{vet} Deiz ha bloaz maro an Ao. Perrot.

D'an 12 a viz Kerzu, eun overenn a zo bet lavaret gand Ao. Person Skrignag evid an Aotrou Perrot hag an D^r Liberal, e Koatkeo, da 8 h. 30.

En draoñenn didrouz, an tri glohig, Ronan, Diwi ha Gwenaël, a zonas kañv, eur wech muioh, da dad ar Bleun-Brug, a gousk eno, e gousk diweza, dindan skeud ar groaz keltieg.

D'ar zul warlerh, 16 a viz Kerzu, da geñver devez a vignoniaj ar B.B. evid Bro-Leon, e oe lavaret eun overenn all evid an Ao. Perrot hag an D^r Liberal, e chapel Sant-Mikael, el leh ma vevas Mikael an Nobletz ha ma oe lidet ennañ B.B. Leon 1952.

Da 10 h. 30, ar chapel en em gavas leun-kouch, tud diredet dreist-oll euz parrez Plougerne a anaveze mad an Ao. Perrot, p'eo bet o hure e-pad deg vloaz, araog mond da Skrignag. Eun nebeudig tud a oa deuet ive euz an diavéz, en desped d'an amzer 'fall ha d'an diouer a « esañs ». An Ao. Job. Seite, aluzenner B.B. Leon, a gomzas evid an amzer hirio. Komz a reas c'hoaz euz an Ao. Perrot a zo bet e-doug e vuhez hag en e varo gwir abostol « Feiz ha Breiz ». Laz-kana Plougerne a ganas meur a gantig e-pad an overenn.

An Tad Laurent-Gougay, euz Kervenead, a reas goude eur goazeadenn da ziskouez ar gerentiezh a gaver etre ar han-iliz hag an toniou breizeg. « N'eus ket a doniou, emezañ hag a glotte gwelloc'h ouz pedennou an iliz eged on toniou breizeg kanet war gomzou brezoneg. Kenkouiz all e hell beza laket brezoneg e plas ar homzou latin evid ar han-iliz, pegwir an diou yez a zo moueziet koulz lavared er memez doare. Kement-se n'eo ket gwir evid ar galleg ».

Da 15 h. e oe diskouezet eur film war Bleun-Brugou Plougerne, Landreger ha Baod. Warlerh, an Tad Laurent a zeskas deom kanaouennou kenstrivadegou ar B.B. evid 1957. Goude e oe kanaouenn gand ar re yaouank a oa eno, Yann ar Barz hag Eliane Pronost, koulz ha Laz-Kana Plougerne, a roas da glevet o haerra soniou.

Evid kloza an devez, e oe eur vodadenn gand kuzul B.B. Leon. Y. al Louz ha V. Seite a rentas kont euz an digemer mad bet greet dezo, en deiz araog, gand Ao. Bot, senatour. M^r Lanniliz, hag an D^{ell} a Gerdrel a ginnig park kaer he maner evid abadenñ veur B.B. Leon 1957. Ra vezint amañ trugarekeet.

Red eo bet avad cheñch deiz d'ar Bleun-Brug-mañ. Ar 7 a viz Gouere a zo dalhet dija gand eur gouel braz e Brest. O veza ne jome sul all ebet, on eus renket dibab ar zul warlerh, 14 a viz Gouere.

Ar brezoneg er skol.

Etre hanter miz Du ha fin miz Kerzu, sekretour meur ar B.B. e-neus roet abadenñou (1 h. 1/2 e pep hini), gand « projection » ha magnetofon, er skolioù-mañ : **Combrit** (paotret ha merhed), **Pleyben** (p. ha m.), **Braspartz** (p. ha m.), **Kastellin** (skolaj ha skol-prim.), **Dineault** (m.), **Cast** (m.), **Lokronan** (p. ha m.), **Plagonneg** (p. ha m.), **Plonevez-Porze** (p. ha m.), **Plomodiern** (m.), **Gouezec** (m.). Ar magnetofon a ro da glevet kanaouennou ha displegadennou brezoneg gand bugale **Leon** ha **Kerne** laket keñver ha keñver. Red eo anzav e vez Kerneviz, awechou, treh da vugale Leon, zoken evid an displegadennou. Kement-se a gas da netra ar zorhenn a glask rei da gredi ne vefe ket gouest Kerneviz vihan da zeski ar brezoneg skrivet.

C'hoarierien Vontroulez.

Eun toullad c'hoarierien euz Montroulez, a ya, d'ar mare-mañ, a barrez da barrez, da c'hoari « **Le jeu de Grallon** » bet savet gand Per Helias. Paeroniet eo ar strollad-mañ gand **Emgleo-Breiz** a reseo digantañ ar gounid.

PER TOULHOAD. — Gand plijadur on-eus lennet war niverenn diweza ar gelaouenn halleg « **Ecclesia** » (Genver 1957) eur pennad talvouduz diwar-benn an arzour **Pêr Toulhoad**, a Gemper. Muioh mui e teu e ano da veza anavezet dre Penn-ar-Bed a-bez evid al labourioù kaer e-neus savet dreist-oll e meur a iliz. Lorh a zo ennom o weled brud or henvroad yaouank (ha mignon braz ar Bleun-Brug) o redege en tu all da harzou Breiz. Breizad penn-kil-ha-troad, ha brezoneger ampart (e vignoned a oar pegen saouruz e hell beza e vrezoneg pa fell dezañ konta istorioù), **Pêr Toulhoad** a ra enor d'e vro. N'e-neus ket kemeret da bal « ober breizeg », med beza eun den gwirizennet stard en e vro, en e bobl. Kement-se e-neus roet da arz, da awen **Pêr Toulhoad** muioh a nerz, muioh a lañs da dizoud donnoh, e ene mab-den, kaerder an Aotrou Doue.



LEVRIOU

« **Le Miracle irlandais** », pennadoù dastumet gand Daniel-Rops, embannet e li Robert-Laffont, Paris, 252 pajenn gand skeudennou war an arz iwerzonad, 700 lur.

Eul levr talvouduz ha plijaduruz da lenn diwar-benn kristeniezh Iwerzon an amzer genta ha al levezon he-deus bet er broioù all.

A-walh e vo rei roll ar pennadoù :

Ar burzud iwerzonad — Sant Padrig — Ar manatioù iwerzonad — Iwerzoniz o foeta morioù — Sant Kolomban hag e ziskibien — Sant iwerzonad er Frañs — Sant Kolomban Sant Gall ha Bro-Suis — Iwerzoniz er Belgig — Iwerzoniz e Bro-Skos hag e Bro-Zaoz — Ar spredelèz iwerzonad en amzer genta — Rollou pinijennou iwerzonad — Iwerzoniz war studi ar menozioù kristen — Sant Malachi hervez skridoù Sant Bernard — An arz iwerzonad hag e levezon war ar broioù all — Krin (coffret) Mortain.

Ken aliez a bennad ken aliez a aozour gouiziege.

Moarvad e vefe tro ivez da zével eul levr war ar **burzud breizad**. N'en-defe ket kement a lufr hag hemañ, med dond a rafe war zikour diouiziegezh eur bern tud ken e Breiz ken e leh all.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan.
QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — C.P.P.P. N° 21697




kan an niverennou


Da veza kanet gand bugale 6-8 vloaz.



U. nan daou ha tri kerzom da hoari, pevar pemp ha



c'hweh, ni gnom war ar hreh; u. nan daou ha tri, war-lerh



Yann Va. ni.

I

Unan, daou ha tri
kerzom da hoari,
pevar, pemp ha c'hweh
pignom war ar hreh,
unan, daou ha tri
war-lerh Yann-Vari.

II

Seiz, eiz, nao ha deg,
digor deom da veg.
Ped dant 'peuz? Unneg,
daouzeg pe drizeg?
— A-walh d'ho tibri,
eme Yann-Vari.

III

Pevarzeg am-eus
re yah ha re gleuz;
ha ma choman beo
pempzeg a zavo
lemm, 'me Yann-Vari,
eve! kontilli.

IV

— Pa 'z-pezo c'hwezeg
e vi gwall zanteg.
Méd petra rafes
gand seiteg, paour kêz?
Petra, petra 'ri,
paour kêz Yann-Vari?

V

— Nebeutoh, ni oar
eged gand triwec'h.
— Naonteg, koulskoude,
'vije ket a re;
rag keñver dibri,
gwaz eo Yann-Vari.

VI

Ra zavo dent c'hoaz
en e henou braz;
araog da friko,
ugent dant 'pezo.
Bez soñj d'on pedi,
Yann, pa zimezi.

L. Lok.

Poueza war an notennou merket — strakal an daouarn — merka an taol-mouez
gand ar botou.